

HEKLEV SEVENADUREL



A-dreuz lenn

2



Petra nevez ?

7



Notennoù


18



Herve LATIMIER

**The Chronicles of
Narnia, *The Lion,
The Witch and The
Wardrobe*,**

gant C. S. Lewis,
HarperCollins Children's
Books, 2005,
204 fajenn, 6,90€



Un oberenn vrudet evit ar vugale eo *The Chronicles of Narnia*. Seizh levr a gaver er rummad, an eil eo *The Lion, The Witch and The Wardrobe*. Pevar bugel, daou vreur ha div c'hoar, eo harozed an istor. Er penn kentañ ec'h erruont dre zegouezh ha dre un armel dilhad en ur bed hud renet gant ar Sorserez Wenn, Rouanez Narnia. Lakaat

a ra ar vro da vevañ en ur goañv didermen ha garv. Gwaskañ a ra an holl re a zo a-enep dezhi. Ur vojenn a lâz ez eus pevar zron en he c'hastell evit degemer pevar rener a zeufe eus hon bed-ni... Redek a ra ar vrud ez eo distro Aslan al leon, evit lakaat an traoù reizh. Pa c'houlenn Susan, unan eus ar merc'hed, piv eo Aslan e vez respontet dezhi : « *He's the*

King. He's the Lord of the whole wood, but not often here... » Un doare doue eta. Pa vez e-touez annezidi ar vro e sav un aergelc'h soutil a beoc'h hag a levenez... War-lerc'h avanturioù hag emgannoù start e vez sevenet ar vojenn. Tremen a ra “ar vugale” un toullad bloavezhioù e Narnia met pa zistroont d'hon bed ez eo dres er c'houlz o devoa kuitaet. Aes eo da lenn, gant mousfent alies daoust da galz darvoudoù bezañ kriz. Bed Narnia zo ur bed leun a hudouriezh gant loened a gomz ha boudoù hud e-leizh, reoù drouk ha reoù jentil...


Filmoù zo bet graet diwar al levrioù. Prenet em boa al levr pa oa deuet er-maez ar film kentañ, bet savet gant Walt Disney Pictures, diwar *The Lion, The Witch and the Wardrobe*. Gellout a ran bremañ aliañ ar vugale hag ar re vras o deus soñj bezañ bet bugel, d'e lenn...

Tamallet ez eus bet d'an oberenn bezañ awenet betek re gant ar gristeniezh. Gwir eo e c'heller soñjal er C'hrist pa weler Aslan en em aberzhiñ evit saveteiñ Edmund, unan eus an daou vreur hag en doa trubardet e vreur hag e c'hoarezed, bezañ lazhet en un doare spontus ha... sevel a varv da vev goude. Ne

soñj ket din e vefe dre zegouezh evel-just, met kavout e reer e pep istor fantastek roud relijion-mañ-relijion pe vojenn-mañ-mojenn...

E-kerzh an Eil Brezel-bed e tremen an istor hag embannet e oa bet al levr evit ar wech kentañ e 1950. Kentañ levr embannet met eil lodenn an istor. N'eo ket bet skrivet hag embannet ar seizh levr en urzh kronologel eta...

**Le Parlement des
citoyens, La
convention citoyenne
pour le climat,
gant Thierry Pech,
Le Seuil, 2021,
214 pajenn, 11,80€**



Ul levr dedennus e meur a geñver. Diouzh un tu un deizlevr eus ar C’hendivizad keodedel evit an hin bet dalc’het etre miz Here 2019 ha miz Gouere 2020 (gant ur vodadeg ouzhpenn e miz C’hwevrer 2021 evit reiñ un ali war respontoù ar gouarnamant) diwar c’houlenenn Prezidant ar Republik. Diouzh un tu all, mesket alies gant an tu kentañ, prederiadennoù a-zivout an doareoù da aozañ seurt kendiviz, ar c’hudennoù bet kavet hag an diskoulmoù bet roet, keñveriadennoù gant skouerioù e broioù all, ur sell war mammennoù seurt taol-arnod. Savet eo bet al levr gant an hini a voe, gant Laurence Tubiana, prezidant komite gouarnerezh ar c’hendivizad.

E-touez ar c’hudennoù a oa da vezañ diskoulmet e oa an doare da zibab an izili peogwir e oa bet divizet tennañ anezho


d’ar sort. Ma c’hell seblantout eeun ar mennozh e teu da vezañ diaes da lakaat e plas ma vez c’hoant da gaout ur skeudenn eus poblañs ar vro. Peseurt niver a dud evit ma vo tu da gaout ar skeudenn-se ha gellout aozañ mat an divizoù ? Penaos lakaat an dud da eskemm e gwirionez hep rakvarnioù, klask tizhout ar c’henasant ar muiañ posupl hag implijout ar votadeg nemet pa vez ret groñs ? Penaos bezañ sur e klot ar c’hinnigoù gant an doareoù de sevel lezennoù ?

Displeget eo an diskoulmoù bet kavet en degouezh resis, keñveriet e vez gant taolioù-arnod all, ne vez ket graet eus ar c’hendivizad ur roll rekiyeoù pe ur skouer da heuliañ. Dibar eo bet an taol-arnod peogwir e oa, kazi sur, ar wech kentañ ma veze goulennet digant ur bodad evel-se ober ul labour “raklezenniñ” war un danvez pouezus-kenañ.

Evel-just ez eus bet alioù disheñvel goude ma voe echu al labour. Tud zo o deus lâret e oa bet null an disoc'h ha re all e oa bet mat-kaer. Evit gellout ober ho mennozh setu ali an dud o deus prizachet an traoù : 24% eus ar c'hinnigoù zo bet lakaet e pleustr gant ar gouarnamant pe al lezenn "harpusted¹ ha hin" ; 44% lakaet e pleustr evit un darn

1 *Résilience* hervez geriadur Martial Ménard hag Ofis Publik ar Brezhoneg.

Cache-Cache bâton,
gant Emmanuel Lepage
Futuropolis,
304 fajenn, 29,90€



Anavezet eo kalite labour Emmanuel Lepage gant ar re a blij ar bannoù-treset dezho. Un oberenn ispisial eo al levr-mañ. Kontañ a ra bugaleaj an aozer e-unan. Un emvuhezadur e bannoù-treset. Leun a from eo. E-kreiz an istor e kaver avantur c'hwec'h familh o deus divizet bevañ asambles war un dachenn c'hwec'h devezh-arat en ul lec'h

nemetken pe nebeud-tre ; 14% lakaet e pleustr dre doareoù disheñvel diouzh ar re bet ijinet gant ar gendivizourien-ezed ; 18% lezet mik a-gostez. Dreist ? Null ? Etre an daou ? Barnet e vez bepred un taol-arnod hervez savboent pep hini hep na vefe "ur" wirionez.

Danvez preder e-leizh evit ar re zo dedennet gant an demokratelezh perzhiañ hag ar stummoù niverus a c'hell kemer.

anvet Gille Passet, e Bezhon e-kichen Roazhon, e 1966. Ur "gumuniezh" hag e kaver el levr prederiadennoù war ar pezh a c'heller kavout dindan ar ger-se. Heuliañ a reer buhez ar gumuniezh hag ar c'hudennoù a sav pa lakaer ur raktres evel-se e pleustr betek ma yafe izili zo kuit tamm-ha-tamm. Dave a vez graet d'ur gumuniezh all bet

savet diwezhatoc'h, La Bigo-
tière, evit magañ ar preder.

Anat eo bet ar prantad buga-
leaj en deus bevet du-se un dra a
bouez e buhez Emmanuel
Lepage. Nav bloaz 'oa pa guitaas
e familh Gille Passet. Blaz ur
c'hwitadenn moarvat. Un troc'h
diaes da c'houzañv evit ar bugel.
Eñvorennoù an aozer, re e dud,
re an holl berzhidi bet aterset
gantañ. Ur splujadenn e buhez
tud vunut Roazhon evel ma oa
familh e dad. Ur splujadenn ivez
e meteier ar gatoliked a-gleiz
eus ar bloavezhioù 1960-1970 e
Breizh. *La vie Nouvelle*, Sened

Vatikan II, Abati Boken ha Dom
Bernard Besret... Klask cheñch
an traoù... Personel-tre eo an
oberenn ha tizhout a ra al lenner
abalamour da-se. Ouzhpenn e ro
danvez preder e-leizh war ar
pezh zo bet hunvreoù ar mare,
petra int deuet da vezañ hag ar
c'hentelioù a c'heller tennañ eus
an arnodennoù o deus kredet tud
kalonek zo ober.


Brav-kenañ eo an tresañ,
kizidik ha resis war un dro evel
dour-livadurioù. From, danvez
predet, arz : ul levr da gaout en
e (he) levraoueg !

PETRA NEVEZ ?



**Magali BARON,
Tudual HUON,
Herve LATIMIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Tan de'i,
gant Loeiza an Duigou,
skeudennaouet gant
Anna Duval-Guennoc,
Al Liamm,
168 pajenn, 12€



Disoc'h ur chomadenn aozet gant *Al Liamm*, gant sikour ar gevredigezh IPPA (*Îles et Phares du Pays des Abers*) eo ar romant-mañ ; etre miz Genver ha miz C'hwevrer 2023 e oa bet an div blac'h o skrivañ hag o tresañ teir sizhunvezh e tour-tan Roc'h Gored, e-kichen Plougerne. Ma

oa ezhomm prouiñ eo mat skoazellañ ar c'hrouiñ e brezhoneg eo gouest al levr-mañ d'en ober. Savet mat eo, stank a-fet steuñvenn, souezhus ha kevrinus, leun a ijin hag a breder. Ha goude ma oa bet savet evit ar grennarded ez eo dellezek eus evezh an dud deuet ivez.

Ul labouradeg alumetez eo Tan De'i, bet savet en ur c'hoad don 100 vloaz zo. Er Gêr-Uzin emañ an holl o tifretañ da brientiñ lid an deiz-ha-bloaz, ma vo kanet meuleudi d'an "Tad Pyro", diazezer an embregerezh. N'eo ket ur vuhez seder ha dishual a ren ar vicherourien avat, pa 'z eo ken brevus mont d'ar c'hoad da droc'hañ gwez, ha ken diyac'h labourat ingal gant danvezioù kimiek. Gevier a vez livet dezhe adalek an oad tenerañ, dezhe da chom doñv ha sentus. Traoù iskis a c'hoarvez avat, evel pa vefe an natur oc'h enebiñ ouzh krizder ha lontegezh Mab-den.

Evit kontañ an istor-mañ he deus roet an aozerez ar gaoz da deir zudenn, tri c'hrennard disheñvel-mik a-fet temz spered ha renk sokial : Rubi Pyro, merc'h otus ar rener ; Bohort, mab micherourien, tonket da vezañ brevet en uzin evel e dud, en defe c'hoant da achap diouzh e blanedenn reuzeudik ; hag Elvyn, plac'h didrouz ha diherverzh. An hevelep tra a c'hoarvez gant an tri-se avat : treiñ a reont da loened. Met ne vestroniont ket an treuzfurmadur-se ; a-greiz-pep-kreiz, pa zic'hlann ar gounnar, e krog ar soñjezonoù

hag an eñvorennoù denel da steuziañ, hag e teu al loen war wel... Ret eo dezhe en em glevet evit treuzvevañ gant ar c'hevrin dañjerus-se, ha klask diskoachañ asambles petra a c'hoari e gwirionez er Forest.

Ur souezhadenn gaer eo ar romantig-mañ a blijo hep mar d'ar grennarded, rak c'hoari a ra gant dodennoù gwriziet don a-walc'h e spered Mab-den : an natur hollc'halloudus a zeu a-benn d'en em veñjiñ ; tud a zeu war wel o gwir anien, dieub ha dinask, dindan stumm al loen, evel e dodenn ar *selkie*. Evit ar grennarded ez eo a bouez tem ar c'horf o cheñch en un doare euzhus en desped dezhe ; gant-se e teu ivez ur goulenn diwar-benn darempredoù an tudennoù gant o zud (evel e-barzh danevell Kafka, « Die Verwandlung ») : daoust hag-eñ int liammoù a wir garantez, pe daoust hag-eñ eo dreist dezhe degemer tu dianav ar bugel karet ? Reiñ a ra al levr peadra da brederiañ war bed al labour, war an digevatalderioù sokial, war ar c'hengred hag ar vignoniezh wir. Pinvidik eo neuze, ha plijout a ray ivez d'an dud deuet a zo tik gant ar c'hontadennoù,

gant tresadennoù-bev Miyazaki ha gant ar romantoù moliac'h...

A-fet stumm eo nerzhus hag unvan ar romant ; santet e vez eo bet skrivet ar steuñvenn en un taol, dindan berr amzer, en un doare naturel ha brokus, broudet ma oa awen an aozerez gant aergelc'h manac'hel an tour-tan. Santet e vez ivez ez eus bet krennet kalz a bennadoù, a-drugarez d'ur vrav a labour a-gevret gant skipailh *Al Liamm* : n'eus ger ebet a vefe didalvez.

Ret eo menegiñ evel-just dourlivadurioù Anna Duval-Guennoc. N'eo ket dre zegouezh

he doa skeudennaouet dija al levr *Gwez ar vro*, embannet gant *Al Lanv* : livañ a ra a daolioù bihan ha resis, gant aked bras ouzh ar boudoù bev, gant mousfent avat ouzh c'hoariva bras ardoù Mab-den. Gouzout a ra resteurel an disterañ blevenn war jod ur broc'h, kement hag e blijadur o turiañ an douar. E dremm un den e oar ivez tapout tresoù a zegas soñj eus re ul loen. Hag a-fet golo e vefe bet diaes ober unan kaeroc'h, hag a glotje gwelloc'h gant feson bliv al levr.

MB

Basta !, Sturlevr an emzifenn benelour evit ar c'hennardezed (hag ar re all...),
gant Maria Kronskey ha Marion Le Muzic,
brezhoneg gant Metig Jakez-Vargas,
Embannadurioù Goater,
126 pajenn, 16€



Penaos e c'hell ur vaouez en em zifenn pa vez harellet pe taget gant paotred er straed, er skol, war ar rouedadoù sokial... ? Meur a live tagadennoù zo, ha meur a zoare da ersaviñ neuze. Met n'eo ket anat gouzout peseurt emzalc'h

a zere, ha bez' e c'heller chom skodeget zoken, ken strafuilhet ha ken dic'halloud en em santer. Ne vo ket respontet er memes mod pa vez kont eus ur paotr un tammig pout, eus un dispaker pe eus ur gwaller evel-just. Sturlevr

Maria Kronskey ha Marion Le Muzic a zo fur ha pleustrek er c'heñver-se. Ral a wech e vez ezhomm eus emzifenn fizikel, met mar bez ret, kuzulioù resis a ginnigont deoc'h. An aliesañ e c'heller tremen gant « teir frazenn burzhudus » : da gentañ deskrivañ an darvoud en ur mod simpl hag ergorel (da skouer : « lavaret a rit n'eo ket dereat ma dilhad hag e saouzanan ar baotred »), da eil displegañ peseurt frommoù a santer, peseurt santadurioù (da skouer : « en em santout a ran barnet ha mezhekaet »), ha da drede lavar didro ar pezh a fell dit pe ro un urzh evit herzel ar santimant-se (da skouer : « degemer ac'hanon evel ma 'z on ! »).

**Karantez ha karantez,
ha barzhonegoù all,
gant Naig Rozmor,
TIR,
I 10 pajenn, 9€**

Brud en doa dastumet *Karantez ha Karantez* pa oa deuet er-maez e 1977 e ti-embann *Brud Nevez*. Ne vezed ket kus-

Stumm al levr a glot mat an ar c'hevredig¹ a fell d'an aozerien tizhout : ur sturlevr grafek eo, gant kalz degouezhioù anavezet gant ar grennardezed. Un tamm fent a vez silet en destenn gwech ha gwech all. An ton n'eo ket kentelius, met skoazellus kentoc'h, diwar skiant dastumet er vuhez pemdeziek. Talvoudus hag efedus eo labour an div aozourez neuze. Gallout a raio sikour meur a blac'h, hag emichañs e tegaso goulennoù ha prederiadennoù d'an holl. N'eo ket fall, ouzhpenn-se, kavout seurt danvez e brezhoneg. Klaoustre e vo lennet gant kalzik a vrezhonegerezed hag a vrezhonegerien en o oad krenn !

Mb dB

1 *Public visé*



tum d'ar mare-se da gomz ken frank ha ken laouen eus karantez korf. Tremen a raed gant karantez an eneoù hag ar c'halonoù...

Souezhet eur, hiziv an deiz, o c'houzout he doa graet un tammig reuz oberenn Naig Rozmor en abeg d'ur varzhoneg bennak ma veze komzet splann ha didro eus trid ha skrij. Mez ar chas e oa, hervez beleien zo ! Gwir eo e voe taget feiz hon tadoù-kozh meur a wech gant an aozerez : « En anv ar c'hi staget ouzh ur wezenn da c'hedal ar marv, / Me greñjfe ouzhit o va Doue. » Ken feuket all e voent, moarvat, dre ma rae ar varzhez gant gerioù sakr evit komz eus he Mister joaius : « Pet Alleluia az pezo tennet eus va c'horf digabestr... » Dek vloaz warlerc'h Mae 68, evelkent, ha seizh vloaz goude krouidigezh *Yod-Kerc'h* !

Dipitus eo, marteze, e vije bet dedennet meur a grennard gant c'hwezh ar gwarzh nemetken. Rak ur varzhez wirion zo eus Naig Rozmor. Bliz ar c'horf n'eo nemet unan eus kerdin he zelenn. Kement-se a zo displeget fraezh gant Erwan Hupel (a ginnig hec'h oberenn) ha Bob Simon (a zispieg he buhez), en o fennadoù-digeriñ.


Mat eo reiñ da lenn pe da adlenn ul levr a oa deuet da vezañ diaes e gavout. Fromet eur gant « Daouarn va zad », « Requiem »,

« Hosanna »... Awenet eo ar varzhez gant direizhded an dud hag ar bed. Darvoudoù taer he doa bevet pa oa yaouank. Heson eo barzhonegoù evel « Enkreiz », pe « Evit Gouel va mamm ». Furnez a ziskouez Naig Rozmor er varzhoneg « Huanadenn ». N'he deus ket aon rak an erozegezh, met morse n'eo hudur he gwerzennoù avat. Lidañ a ra ar garantez, e-giz ma vez embannet gant titl eil lodenn he zorkad : « Lid ». « Dit on, o va mestr, / Digor, digor buan /An istrenn perlezennet/Pell zo o c'helver da bokoù. »

Dizingal eo an oberenn avat, gwall zizingal zoken. Pezhioù evel « Kalanna ar mabig Jezus », « Ar “Plan Orsec” e Rosko », « Al loargann », a zo diamzeret ma n'int ket gwan... Met un daouzek barzhoneg bennak a chomo, hag a chomo pell, da'm soñj, e kalon al lennerien, evel « Dishual », an hini diwezhañ holl, ken azonus eus tro-spered ar varzhez.

Mb dB

Komzoù dichipot,
gant Emile Granville,
Embannadurioù ar Peniti,
184 fajenn, 12€



Buan e cheñch ar bed, met an ideologiezhioù kozh hag ar re nevez, kenkoulz all, a vir ouzhomp, gwall alies, a soñjal drezomp hon-unan, en hor frankiz. Sed a embann Emile Granville en e *Gomzoù dichipot*, ul levr prederiadennoù, gouestlet d'un triwec'h dodenn bennak, ma ro skouerioù diouzh an druilh eus ar bed o treiñ hag eus ar respontoù “prest-ha-tout” a vez lakaet warnomp gant an ideologiezhioù ha dreist-holl gant an ideologourien o luganoù skedus. Diouzh ar skiant en deus prenet pa rae e dammig treuz er bed politikel – ha sourradoù c'hwervoni a santer etre al linennoù – e keuz an aozer kresk an dic'houzañvusted¹. Ar salmennoù o deus kemeret lerc'h an emzivizoù. Buan ez oc'h kataloget e “kamp ar mad”

1 intolérance


pe e “kamp an droug”, e diabarzh an Emsav zoken. Ha gwashoc'h an traoù c'hoazh gant al luskad Woke, a laka ez oc'h kablus dre ouenn. Koulskoude, evit kaout diskoulmoù da gudennoù aloubus evel ar groñsaat relijiel er banlevioù, an dram, al lojeiz, an enbroerezh a-yoc'h, n'eus ket tu da dremen gant ideologiezhioù a ginnig respontoù marv da gudennoù bev. Ur seurt *realpolitik* a vez erbedet gant Emile Granville neuze. Dedennus em eus kavet e zielfennadurioù peurvuiañ, war dazont hor yezh, war disoc'hoù politikel hor strolladoù politikel breizhat, war endro ar vroadelezh e Breizh... Teurel a ra ur sell pervezh ouzh kredennoù sonn zo. Mankout a ra kinnigoù pleustrek marteze, evel ma chomfe an aozer war vevenn an dibaboù. Gant ma vo

kendalc’het, eur techet da bediñ,
rak dibaot a wech hon eus tro da

lenn levrioù prederiadennoù
politikel e brezhoneg.

MbDb

Kevrin an diamant glas,
gant Laurence Lavrand,
Keit Vimp Bev,
44 fajenn, 6€



Levrioù niverus a vez embannet evit ar yaouankizoù gant *Keit Vimp Bev*. Un dra vat evel-just evit lakaat anezho da lenn ha da gaout un tamm plijadur gant al lennegezh vrezhonek. Evit derc’hel stad eus live yezh ar vugale (hag hini an dud deuet kenkoulz all !) ez eus bet ijinet rummadoù levrioù azasaet. En o zouez ar rummad « Aes da lenn », ur rummad gouestlet d’an deraouidi. Istorioù berr, gerioù displeget e traoñ ar bajenn, ha kemmadurioù lakaet war wel gant lizherennoù tevoc’h. Gant-se, emit-hu, ne zlefe ket bezañ gwall zruz ar geusteuenn... Sed ar pezh a soñjen. Faziañ a raen. *Kevrin an diamant glas* am eus

lennet gant plijadur, en un tennad. Ur c’hendiviz eo etre un tad-kozh hag e vab-bihan, a-zivout istor maner Trevare, deuet da vezañ Lise Fenelon hiziv an deiz e Brest, war bikern an tornaod, a-us d’ar porzh. Savet e oa bet gant an Aotrou Sears, a-orin a Vro-Skos, e 1882. Dastumet en doa hemañ kalz arc’hant o pourveziñ gaz da c’hêr-Vrest, evit ar postoù-gouloù. Mervel a reas abred, met e wreg, pennhêrezh anezhi, a vevas er maner gant he eil gwaz. Eno e veze kaset anezhi gant begenn ar vro ha *le tout Paris*, mar plij... Rak brudet e oa ar priedoù evit o brokusted, ha n’o doa ket aon rak frotañ grifoù.

E-kreiz kentel istor ha sokiologiezh an tad-kozh e tifluk un afer diamantoù laeret. Piv en deus graet an taol ? Piv a vo tamallet ? Petra eo deuet an diamant glas da vezañ ? Maurice Leblanc, dedennet gant ar c'hevren-se, en

deus savet unan eus enklaskoù Arsène Lupin diwar al luziadell-mañ. En un doser berr, e fin al levr, e vez resisaet an degouezhioù istorel. Ul levr berr neuze, met turgnet brav.

MbdB

Konstantinopolis,
gant Clyde Dlugy-Belmont,
Keit Vimp Bev,
60 pajenn, 7€



Ral a wech e lenner romantoù istorel en hor yezh. *Emgann Kergidu* zo an nemedenn vrudetañ moarvat, daoust ma chomer hanter-hent etre ar romant hag ar gronikenn. Armel ar Sec'h ha Goulc'han Kervella o deus pleustret ar gennad-se ivez, met n'eo ket gwall fonnus an eostad, nemet dre hanterouriezh an troidigezhioù e vefe, reoù romantoù Paol Feval en o zouez. Plijusoc'h a se, neuze, ober anaoudegezh gant mareoù ar Grennamzer e Breizh hag er bed bras, gant istor sez ha dizalbad Konstantinopolis, dre zaoulagad

ar c'hrennard Hoel, mab un noblañs eus Kommanna.

Trubuilhoù a zo e Breizh, d'ar mare-se, etre an dug Arzhur hag Yann Dizouar. Bandennoù soudarded a red dre ar vro. Puilhañ a ra an taolioù-red hag an taolioù-krog. Ur fazi en deus graet Hoel, dre ziuver a evezh, pa oa oc'h ober ged. Dre e wall ez eo marvet kalzik tud. Ne gav nemet un hent evit en em zic'haouiñ : en em rollañ er pevare kroaziadeg. Kuitaat a reomp Breizh evit mont da Bariz. Hag en hent war-zu Jeruzalem, da zieubiñ ar gêr sakr diouzh ar

vuzulmaned, sañset. E 1202 emamp.

Dre Venezia e tremen an ergerzhadeg evit lestrañ war-gaout an Ejipt a-raok tizhout Jeruzalem. Met dre ma vank arc'hant evit paeañ ar veaj e rank ar groazidi reiñ harp d'ar Venezidi evit adkemer keodedoù zo bet kollet gant Venezia. Kêr Zara, da skouer, daoust m'eo kristen hec'h annezidi. Ur gwir lazhadeg. Eus an eil kont d'eben e teu ar groazidi d'ober sez Konstantinopolis. Entanañ ha lazhañ a reont, un euzh ! Hoel ne gemer ket perzh er boserezh-se. Graet en deus anaoudegezh gant Eudoksia, ur plac'h eus ar vro. Tec'hout a ra pell diouzh al lazhadegoù ha dont en-dro da Vreizh ganti.

E-keñver an istor ez eo gwiriek an abadenn deñval-se. Peadra zo da zastum deskamant diwar-benn emzalc'h ar groazidi e-ser Clyde Dlugy-Belmont. Aesoc'h intent, neuze, perak e oant bet lakaet da varbared gant an arabed¹... E-keñver an dezrevell on chomet un tammig war va c'hoant avat. Blaz an diechu hag ar re nebeut... Peadra a vefe da vont donoc'h en dar-

voudoù hag en darempredoù etre an tudennoù. Skrivet eo bet ar romantig-se evit ar grennarded, ha n'eo ket fall e ve berr neuze, ken diaes eo lakaat anezho da lenn e brezhoneg. Re skort eo trede lodenn al levr koulskoude, e-giz p'en defe bet c'hoant an aozer da dreiñ ar bajenn ha mont da beuriñ e lec'h all. Danvez zo ennañ evelato, hag emichañs emañ o prientiñ un eil levrenn, goude an distro da Vreizh. Gant plijadur ez adkavin e skridoù da zont.

MbdB

1 *Les croisades vues par les arabes*, Amin Maalouf, Lattes, 1986.

**Sachit warni !
aotrou Lapin,**
gant Claude Boujon,
12€,
10 kazh,
gant Emily Gravett,
13€,
TES



Emañ TES o paouez embann daou levr kaer evit ar vugaligoù, da vezañ lennet dezho gant o zud sur-mat. *Sachit warni ! aotrou Lapin* a zo bet aozet gant Claude Boujon ha lakaet e brezhoneg gant TES. *10 Kazh* a

zo diwar zorn Emily Gravett ha lakaet e brezhoneg gant Riwal Georgelin. Ur gaer a levr hemañ gant livioù sof-kont. Un digarez d'ober anaoudegezh gant an niveroù hag al livioù.

TH

**Manifeste pour un
statut de résident en
Bretagne,**
81 bajenn, 10€
**Taxer les résidences
secondaires ?,**
67 pajenn, 8€
gant Nil Caouissin,
Presses populaires
de Bretagne



Diaes e vefe bet komz eus al levr kentañ hep komz war memes tro eus an eil. Klokaat a reont an eil egile ha degas a ra an eil kinnigoù resisoc'h deuet diwar an eskemmoù zo bet war-lerc'h al levr kentañ.

Unan eus pevar dilennad UDB e Kuzul Rannvro Breizh 4 eo Nil, ezel eus ar stroll « Breizh a gleiz » eno. Bet eo bet mouezh aotreet UDB etre 2014 ha 2019.

Taget e oa bet mennozh diazezh al levr kentañ en un doare dizonest

oc'h ober van kompren e kinnige reiñ an aotre da brenañ un ti d'ar "Vretoned a orin". Pa lenner mat an titl e weler splann n'eo ket danvez ar c'hinnig. Perzh dispar a levrig-mañ eo bezañ bet lakaet war wel ur gudenn a bouez : deuet eo diaes-kenañ d'ar re a fell dezho labourat e Breizh kavout lojeiz ha peurgetket d'ar re yaouankañ anezho. An abeg pennañ eo plas an eil tiez hag ar re a vez feurmet d'an douristed ha n'eo ket d'an dud a vev er vro. Diouer a diez ha prizioù uhel-meurbet. Ne dremen ket kalz amzer bremañ hep na vefe gwelet pennadoù o lâret pegen nec'het eo maered zo gant ar saviad. Un trec'h evit al levrig eta.

El levr kentañ e kaver ur ger gant rener an ti-embann, Gael Briand, hag ur rakskrid gant Yves Lebahy anvet « *L'importance de la délicate question des résidences secondaires* ».

Er manifesto e-unan e kaver div lodenn ; da gentañ un taplen-nadur eus stad an traoù : « *La concentration des résidences secondaires : un problème localisé mais lourd de conséquences* ». Sklaer ha titouret mat eo al lodenn-mañ. Pazenn ret evit gwelet mat pouez ar gudenn.

An eil lodenn : « *Quelles réponses politiques pour libérer des logements dans les communes littorales ?* ». Tri ziskoulm a vez kinniget ha burutellet. Ar « statud annezad e Breizh » eo an hini diwezhañ. Ar gwellañ tra eo lenn al levr evit kompren mat ar c'hinnig. E fin ar rann ez euz ul lodenn verr « *Vrais et faux problèmes...* » dedennus-tre evit kaout respontoù da arguzennoù zo bet klevet a-enep d'ar c'hinnig.

Ma oa ar pouez war ar statud annezad el levr kentañ e teu en-dro an eil levr war unan eus an diskoulmoù all : implijout an taosoù evit bountañ pere'henned an eil tiez da feurmiñ anezho dre vloavezh ha n'eo ket evit ar vakañsoù ha, marteze, da gavout gwelloc'h gwerzhañ anezho. Diskouez a ra Nil el levr e tlefe an taos-se bezañ war live ar c'huzul Rannvro evit bezañ efedus. Reiñ a ra raktresoù disheñvel eus ar pezh a c'hellfe bezañ an taos.

Ma ro an daou levr-mañ titouroù a bouez war stad al lojañ e Breizh e roont ivez danvez preder evit klask diskoulmoù. Kinnig un toullad d'ar breud zo an hent gwellañ evit mont war-raok...

HL

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

PROFOÙ

Miz Ebrel : Charlie GRALL ; Marc GUIRIEC

— War un dro : 10€

Miz Mae : Gireg & Marivon KONAN ; PAOL. & M. -T. CALVEZ ; Jan-Maï ha Maï-Gristin GWERNHALEG ; Jean-Claude LE THOMAS ; Pol Yvon VIROT ; Paskal HERVIO ; Herve AR BIHAN ; Riwal HUON ; Patrice DREANO ; Paskal TABUTEAU ; Malone ROLLAND ; Maryvonne CUDENNEC ; Paul AUFFRET ; Paol AR MEUR ; Huguette GAUDART ; Ivon AR GAG ; Yves Kernalegenn ; Alan ER HOULVENN

— War un dro : 281,50€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

AR REDADEG 2024

Eus Beg ar Raz, war gumun Plougoñ eo e loc'ho ar Redadeg d'ar 17 a viz Mae 2024. Un droiad dre Vreizh a-bezh evit erruout

d'ar 25 a viz Mae e Montroulez. « Treuzkas » eo dodenn ar wech-mañ.

Un droiad a 1700km e vo. Muioc'h a ditour war o lec'hienn : ar-redadeg.bzh.

KAN AR BOBL 2023 _____

Kalz a dud a oa e Pondi d'ar Sadorn 15 ha d'ar 16 a viz Ebrel. 50 vloaz Kan ar Bobl a zo bet lidet. D'ar Sadorn e oa ar c'henstrivadegoù hag ur fest-noz. D'ar Sul beure ur sell war istor ar gouel a-hed an 50 vloaz tremenet, ur pred kanet da greisteiz, kenstrivadegoù da 2 eur, hag ur fest-deiz. Setu disoc'hoù ar bloaz-mañ a c'haller adkavout war o lec'hienn (kan-ar-bobl.bzh) :

Solo

Nolwenn BAUDU
Meriadec SURZUR
Mateo MAUPEU

Daouad

ANTOINE/DELANOE
LEPENVEN/CLAUDE
ROBBE
Priz kalonekaat : LES MOUCHERONS

Strollad

FALL FOEN
KRAAZ
LITHA
Priz dibar : DIDRUBUILH

Kan ha sonerezh

Gaël ROLLAND
TRI PEDWAR

Priz krouidigezh : Awen PRIGENT ha Leandre SAVINEAU

Kan-ha-diskan

YHUEL/DAGE

Rampo : GUELOU/GUELOU hag HYGUINEN/LINTANFF

Priz ar juri evit ar re yaouank : MOLLO BREJENT

Priz ar fent : KEVIN ABALIN

Skolioù, skolioù-mamm ha klasadoù o-unan

Skol Vamm Diwan Sant-Brieg

Skol Bublik Laruen

Priz moutig : Skol Diwan Kemper Kerfeunteun

Skolioù, kelc'hiad 2-3

A-unvouezh : Skol Diwan Gwengamp, bam-kalon ar juri

Rampo : Skol Germaine Tillon (Pluneret) ha Skol Gwerledan
(Mur)

Rampo : Skol bublik Pleiber-Krist ha Skol bublik Rostrenn

Priz krouidigezh : Skol Sant Erwan (Glomel)

Skolajoù

Ar priz nemetañ : Skolaj Santez Anna (Plougastell-Daoulaz)

Kontadennoù e gallaoueg

Maurice LE DOURNEUF

Jean RUAUD

Paul RECOURSE

Priz krouidigezh barzhel e gallaoueg : Jean-Luc LACQUITTANT

Kontadennoù e brezhoneg

Patrig DREAN

Jos GOAPPER

Patrick LE BRUN

Bam-kalon ar juri evit ar strollad tud yaouank-mañ : Mael Le Garrec, Ewen Pipet-Penin, Rosali Le Flecher ha Maelie Evano

Kan da selaou

Anne Suignard-Bouliou

Rampo : Natacha ha Koulma – Gaëlle Trébaol ha Jacqueline Cornec

Priz kan e gallaoueg : Gérard Blouin

Meneg da : Tunvezh Gloaguen hag Axel Perret

Meneg krouidigezh da : Guy Madec, Mannaig Le Dortz, Antoine Le Fée

Meneg kenloded gant an arvesterien da : Jakez ar Borgne

Kanit 'ta bugale (dindan 18 vloaz)

Mina hag Ider Josso Arhird

Strollad 1 stal Kan Ti ar Vro Gwened

Koupaia ha Bieuzi

Prizioù ar c'henstag, rampo : Fin ha foll – 6 steredenn

Tud kar

Ayoul tad ha mab

Familh Korfec

Priz an treuzkas : Famille Carel

GOUEL AR BREZHONEG 2023 _____

Bed ar brezhoneg bodet e-pad 3 devezh eo ar festival GBB. Bep bloaz ampar (plas d'ar *Redadeg* ar bloavezhioù par !) e vez dal-c'het. Emgav d'ar Gwener 30 a viz Mezheven, d'ar Sadorn 1^{añ} ha d'ar Sul 2 a viz Gouere 2023 e Langoned. Brezhoneg war al leurennoù, er stalioù, war ar skrammoù ! 'Vit c'hoari ha 'vit deskiñ ! Brezhoneg 'pep lec'h, war ar blasenn hag ouzhpenn ! Ur gouel ken liesseurt hag ar brezhoneg bepred gant liv ar stourm : Brezhoneg ofisiel, sed aze an ahel ! Donemat e festival GBB neuze !

Gant lizher miz Ebrel 2023 (niverenn 36) e ouezer ez eus :

- 47 skol, 6 skolaj ha 2 lise
- 4045 bugel skoliataet
- 754 000€ a brofoù resevet
- 5 milion a vudjed evit ar mont en-dro

Koulskoude ez eus diaesterioù gant prefeti Penn-ar-Bed. Ar forfed a rank bezañ paeet ha kumunioù zo a nac'h c'hoazh evit abeg-mañ-abeg. Pa sav kudennoù etre ur skol hag ur barrez ez eo labour ar prefed aozañ un emvod evit kavout un diskoulm (ha displegañ d'an ti-kêr e rankont dre lezenn paeañ ar skodenn-skol).

Diaesterioù a zo en departamant-se ha mut e chom ar prefed koulskoude ! Ne respont da lizher ebet... Pa ouier ez eo labour ar prefed « lakaat e pleustr al lezennoù ha bezañ sur e vezont doujet » ez eus peadra d'en em c'houlenn hag-eñ ne ra ket prefed Penn-ar-Bed fae ouzh hor bugale hag hor yezh.

NAONED E BREIZH

Ur c'hinnig lezenn a zo bet savet gant Paul Molac : goulenn digant annezidi Liger-Atlantel o ali diwar-benn o departamant. Stag ouzh Breizh 4 pe get ? Ur referendom a gomzer diwar e benn abaoe ur pennad zo. Met ne weler tra fetis ebet o tont. Un toullad dilennidi a bep tu a sav a-du gant kinnigoù Molac. Met an hent a vo start ha kalet a-raok gellet kaout un tamm spi.

Hervez un enklask IFOP e 2021 e vefe 63 % eus annezidi Liger-Atlantel a-du gant an adstagañ ; 80 % oute a-du gant ur referendom ; 66 % eus annezidi departamantoù all Rannvro al Liger-Atlantel a-du gant ar referendom-se.

UR FRAZENN DA REIZHAÑ

En niverenn 457, er pennad a-zivout levr Georges Cadiou diwar-benn Marcel Cachin, p.94, e c'heller lenn :

« Ne oa ket posupl lec'hiañ e vuhez stourmer ouzh emdroadur ar bed komunour betek marv Jozef Satlin... »

Ar frazenn reizh a zo : « Ne oa ket posupl lec'hiañ e vuhez stourmer en **diavaez eus** emdroadur ar bed komunour... ».

Aozer ar pennad n'en deus ket adlennet mat a-walc'h. Digarezit anezhañ...

GERIADUR BREZHONEG-KEMBRAEG ENLINENN

Rita Morgan Williams, Kembreadez, a oa kelennerrez brezhoneg e skol-veur Aberystwyth er bloavezhioù 1970.

Troet he deus bet danevelloù diwar ar brezhoneg e kembraeg (*Storiau o'r llydaweg*) ha savet ur geriadur kembraeg-brezhoneg bet embannet gant skol-veur Aberystwyth e 1994. Troet he deus ivez ar romant *Mari Vorgan* gant Roparz Hemon, *Morforwyn*, embannet gant Canolfan Astudiaethau Addysg Aberystwyth e 1995.

Pa oa war he leve he deus labouret war ur geriadur brezhoneg-kembraeg. Dibabet he doa e skignañ war ar rouedad e-lec'h ober un embannadur war baper.

Rita Morgan Williams a zo aet da Anaon e 2018 hep na vefe peurechu he raktres.

Goulennet he doa skoazell Kristina Roudaut ha Derec Stockley evit kas al labour da benn. Ar pezh o deus graet.

Kavet e vez ar geriadur enlinenn bremañ war :

<https://bzh.cymru/index.php/br/geriadur>

Labour lakaat ar geriadur war ar rouedad a zo bet graet gant Dyfrig Berry, ar pezh en deus un tamm koust.

Bez' e c'heller sikour arc'hantiñ al lec'hienn o vont e darempred gant :

Kristina Roudaut ha Derec Stockley :
kristinaroudaut@hotmail.com
pe dre al lec'hienn : bzh.cymru/index.php/br/geriadur
pe dre lizher : An Aoled, 32, Kelorn, 29890 Kerlouan

Trugarez d'an holl re a c'hell sikour.

BREZHONEG ER MINI TRANSAT

A-gevret emañ bed ar brezhoneg evit brudañ ar yezh ha souten war un dro ar skipper Tomaz André, skolajiad kozh Diwan. Evit-se e lakaomp e pleustr ur *c'hrowdfunding* evit arc'hantaouiñ ar redadeg.

D'ar 24 a viz Gwengolo 2023 e loc'ho 24^{re} redadeg ar Mini Transat. 90 moraer a dreuzo ar Meurvor Atlantel o-unan en o bag, er vag vihanañ a zo da verdeiñ war ar morioù don, ur Mini 6,50 metr. Loc'hañ a raio ar redadeg eus Traezh-an-Olonne (*Sables-d'Olonne*) etrezek ar Gwadeloup.

Ambrouget e vo Tomaz André en difi-mañ gant Diwan hag a roio e livioù da gouc'h ha da ouel vras e vag.



E skolaj Diwan Gwiseni en doa desket Tomaz André brezhoneg. Reiñ brud d'ar brezhoneg ha d'ar skolioù Diwan a zo a bouez evitañ. A-drugarez d'ur c'houlzad mesenerezh hag arc'hantañ

a-stroll war *Kengo*, en deus Tomaz fiziañs e vo paeet ul lodenn eus e vizoù kemer perzh er redadeg ha da lakaat e vag e ratre.

Gant ar Mini-Transat e fell da Domaz André brudañ kelenn ar brezhoneg hag ar c'helenn e brezhoneg. Komz a raio eus e Mini Transat er skollajoù hag er skolioù Diwan. Un teulfilm e brezhoneg a gonto kement-mañ war *France3 Breizh*.

Kontañ a reomp warnoc'h evit kemer perzh en arc'hantañ *Kengo* ma c'hellloc'h ! Forzh peseurt sammad a vo degemeret mat. Trugarez !

<https://www.kengo.bzh/projet/4269/thomas-et-diwan-sur-latlantique>

GOUEL AL LEVRIOÙ E GWENED _____

Etre an 9 hag an 11 a viz Even eo bet dalc'het ar 16^{vet} Gouel al Levrioù-mañ. Berzh en deus graet, niverus bras an dud. Priz ar romant e Brezhoneg, kenaozet gant *Skol Uhel ar Vro* hag *Emglev Bro-Gwened*, a zo bet roet da Yann-Charlez Kaodal evit e romant *Fulenn*. Embannet e oa bet gant *Al Liamm* e dibenn 2022.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d'ar skrivagner.